

48

## Barzonek

(375)

En enor da la Tour - d' Auvergn,  
 genta Grenadier a Franç,  
 erit beza canet e Kœr - Ahès, deiz lid statu an Haros,  
 Ar 27 a even, 1841, daou-uguent vloas just goude e varo.

Var ton : Gomp oll, bugale gennois.

Salud, ô Haros bras Breiz - Izel,  
 La Tour - d' Auvergn, scoier ar vaillanç,  
 Te pini a voe atao fidel  
 D'ar bannier sacr demeus ar Franç! (2 vech.)  
 Sell diouzomp diouz lein an ênvru  
 Armâ oll etal da imach,  
 O rentâ did hor güir hommach  
 Hac ourz da veuli dre hor moueziou.  
 Gload da La Tour - d' Auvergn, scoier eus ar güir vaillanç!  
 Breizis! Breizis! celebromp oll Genta Grenadier Franç!

Seitec vloas ha pèver - ugent zo  
 Kœr - Ahès a velas quenel  
 An Haros bras a veulomp hirio,  
 Vaillantâ den a Breiz - Izel. (2 vech.) (376)  
 En deiz - mâ, ni, Armoricanet,  
 Dirac an den ar vaillantâ,  
 Toüomp da veza dign ountâ,  
 Rac ni ivez e Breiz omp ganet. Gload, &c.

A boan a bemzec vloas voe oajet,  
 Ma sant e galon o sailla:  
 Goad Turen 'red en e voaziet;  
 Birvi a ra d'en imita. (2 vech.)  
 Redec a ra vit en em vesca  
 Etouez hor zoudarded vaillant;  
 Atao e penn e rejimant,  
 Netra na ell ountâ resista. Gload, &c.

Mes ar zeiz - varmugent a even,

(377)

Ebars er bloavez mil eiz cant,  
 Er penn demeus e c'hrenadourien,  
 Pa gombatte an den vaillant, (2 vech.)  
 E creiz ar c'harnach eus ar goassa  
 E voe lazhet gant un tol lang  
 Ar c'henta Grenadier a Franç,  
 Un harros demeus ar vrassa.

O devez a c'hloc'har hac ~~er~~ gaon er Franç oll!!!..  
 Breizis! Breizis! e c'hloar heptgen hor c'honsol euz e goll.

Eur seurt maro voa dign dioutan,  
 Peguement m'eo meurbet garo,  
 Rac neus get caeroc'h fin er bed-mã  
 Eguet mervel vit ar vam-bro. (2 vech.)  
 Coueza 'ra evel eur giir haros,  
 En eur gombatte gant ardor:  
 Maro eo er c'hamp-a-Enor;  
 En ãnt e mã brêmã o repos. Gload, &c.

(378)

O veuli hon Haros en deiz-mã  
 E veulomp an oll vertuziou,  
 Rac oll e voant unanet ennã:  
 En eo Haros an oll vroyou. (2 vech.)  
 Lealdet, furnez ha vaillantis  
 A gargue bepret e galon;  
 Berza voa scoier da bepr Breton;  
 Groump eta, cosiad, yaouanqis: Gload, &c.

Carantez sac'r demeus hor mam-bro,  
 Cundu ha harp brez'h peb Breton,  
 Ha gra ma en devezo ato  
 Courach hon haros er galon. (2 vech.)  
 Scrifomp bepret var hor quitonou:  
 La Tour-d'Auvergn, Breiz-Ingl, Franç,  
 Hanoyou leun eus a vaillanç,  
 Hac a ray tridal hor c'halonou. Gload, &c.

Ah! ra vezo an devezo caer-mã  
 Gravet atao en hor memor,  
 Vit ellout d'hor bugale conta  
 An hommach rentet d'an enor. (2 vech.)

50

O clèvet fèjou an den vaillant,  
E tèsqint dont d'ey imita,  
Erit un deiz ellout beza  
Eveltàn leun a gourach ardant.  
Gloar da La Tour - d'Auvergn, &c.

A. Lédan.

(Vol. VI, p. 375-378.)  
8 str. numérotées.